

Revolusion 1848

ha

Deveziou miz even 1848

Tennet eo ar skrid-mañ euz « Lizerou Breuriez ar Feiz », 1848. Savet e oa bet ar gazetenn-ze gand Eskopti Kemper ha Leon e 1844. Brezoneg ar gazetenn a oa hini "glan" ar Gonideg, neuze digomprenuz a-walh evid ar vrezonegerien, na ouie ket lenn an darn-vrasa anezo ouspenn. Greet 'z eus bet gand "pehini, pere" evel ma vezed boaz en amzer-ze. "Reizet" on-eus ar frazennou-ze. Ar geriou "gouarnamant" ha "pobl" a zo bet implijet gwregel, nemed gourel ar raganoiou bet lakeet en o flas, er memez frazennou, gand levezon ar galleg. Lakeet on-eus anezo gwregel. "Brezonekaet" e oa bet an anoiou tud ha lehiou. Adroet on-eus dezo o stumm galleg, da lavared eo o hini gwirion.

Adembannet on-eus ar pennad-se, p'on-eus soñjet e oa beo buhezeg, plijuz da lenn. Rei a ra tro da anavezoud pere a oa mennoziou tud an tu dehou en amzer-ze, mennoziou a hañval iskiz a-walh deom-ni bremañ, mennoziou "amoed" memez. Tud vad a zo euz ar bobl, nemed ez eus eun nebeud tud fallagr, siwaz. A-du e hañval beza an oberour gand ar Republik, da genta p'enoa greet Loeiz-Felep da Charlez X ar pez a erru gantañ, da houde pa oa ar Republik-se unan "onest ha deread", hini an "dud pinvidig hag a urz", tra ma ra *komunisted* horrubl euz "dispaherien" miz even 1848, a ouezom-ni int bet lazet ha drouglazet gand Cavaignac. Pa ra kaoz euz an eleksionou, e tiskouez ivez, daoust dezañ sur a-walh, e oa parrezioù 'zo euz Breiz-Izel krenn a-du gand ar Revolusion Vraz, an hini he-doa roet o frankiz dezo, an hini he-doa distrujet da vad amzer an Aotrouien hag an Noblañsou, o "gwiriou-dreist", "gwiriou Breiz" sañset, hervez tud 'zo.

N'eus ano oberour ebed. Marteze eo bet troet ar pennad-se euz ar galleg, evel an oll re all euz ar gazetenn, med marteze ivez eo bet savet war-eeun e brezoneg.

A. ar Merser.

Lizer d'ar Vretoned diwar-benn an traou nevez a zo c'hoarvezet e Bro-Hall, abaoe ar bevare warn-ugent a viz c'hwevrer 1848.

Pell a oa en em glemme ar vro diouh gouarnamant Loeiz-Felep. Setu amañ darn euz ar pezh a zo bet tamallet dezañ.

Gand aon n'o-divije ar rouaned all disklêriet brezel dezañ, dre 'n abeg ma en-devoa kemeret kurunenn e genderv Charlez X, Loeiz-Felep a blege dezo e pep tra, hag er hiz-se e kolle, en diavêz-bro, enor ha komers e rouantelez.

Pa bignas Loeiz-Felep war an tron, e oe greet d'ar vro ar promesaou ar re gaerra. Ar gwiriou a vije distaolet ; hag ar gwiriou a oe kresket euz eun drederenn. Ne vije mui a brosezou diwar-benn skriva pe brezeg e vennoziou war ar feson da ouarn ar vro evid ar gwella ; ha padal biskoaz ne oe gwelet kemend a geleier harzet ; kemend a skrivagnourien barnet ha prizoniet. Al lezennou douget er bloaz 1835 'eneb ar voullerez hen diskouez da beb unan.

Eul lezenn vad a dlee beza greet heb dale war ar skoliou : frankiz o-divije ar gerent da rei d'o bugale ar vistri hag an deskadurez a garjent; hag al lezenn-ze a hortozet c'hoaz hirio an deiz. Kaer on-eus bet ober klemm ha goulennou ha dre Gannad ha dre skrid, ar ouarnamant a gave mad rei kentel d'or bugale diouh he doare, hag he henteliou ne oant ket atao kenteliou ar feiz katolik.

An eleksionou a oa deuet da veza a-vraz marhajou mezuz. Ar ouarnamant, evid kaoud an uhella mouez e-barz ar gambr, a brene ar Gannaded ; ar Gannaded, evid mond d'ar Gambr, a brene an elektourien ; an eil rumm hag egile a gave an tu da gaoud e zigoll diwar-goust ar vro, hag ar re ne oant ket elektourien a bae an abadenn. Ar re a bake ar hargou uhella a werze kargou izelloh, hag ar brenerien en em zihaoue d'o zro gand skraperez. Er hiz-se, daoust d'ar gwiriou da greski beb bloaz, or porziou-mor, or magazinou, koufrou ar rouantelez, a oa paour ha paour atao.

Warlene dreist-oll e savas eur hri-forz eneb ar marhajoù-ze deuet da veza beteg re stank ha re anad. An oll a houlenne eur *reform*, da lavared eo, an oll a houlenne e vije greet eul lezenn nevez war an eleksionou, ha gouarnet onestoh ar vro. An dispaherien vrasa, evel na hellent ket en em zastum evid kaozeal war ar pezh a oa da ober, rag eul lezenn a zivenne kement-se outo, en em lakaas da ober leinou braz, en em gavent enno beteg pevar ha pemp kant den war eun dro. Eno, war zigarez debri hag eva, e tivizent war aferiou ar vro, hag e tamallent ar ouarnamant heb he espern. Ar bankejoù-ze, hen kredit, na blijent ket da vinistred ar roue. Lakaad a rejont Kambr ar Gannaded da zougen klemm d'ar roue en o eneb, hag e-barz ar respont a reas ar Gambr da gevridi ar roue, e oe anvet ar vankejerien-ze : *enebourien ar vro, tud karget a wall-youl hag a zallentez*. Pevar-ugent Kannad en em gave badezet euz an ano kaer-ze, rag bet e oant er bankejoù... O zro a hortozent. Ministred ar roue a yeas pelloh c'hoaz. Eur banked braz a dlee beza greet e Pariz memez, d'an 22 a viz c'hwevrer; divenn a rejont na vije greet. Ar banked a chomas a-gostez, mez ar revolusion a darzas.

An 22 a viz C'hwevrer

D'ar meurzh, 22 a viz C'hwevrer, deiz merket evid ar banked, war-dro deg eur diouz ar mintin, e oe gwelet oh en em zastum war dachenn ar Panthéon, bandennadou tud, gwisket gand flotantennou glaz, krenn-baotred evid an darn-vrasa, hag en o zouez tud a vin fall, evel m'o haver bepred e leh ma'z eus c'hwez eun dizurz bennag. Tri-hant e oant d'an taol kenta, hag heb dale ez eus c'hweh mil anezo. Balea a reont dre ruiou Pariz, en eur gana ar *Marseillaise*, hag en eur grial : *Bevet ar Reform! D'an traoñ Ministred ar Roue!* Felloud a ra dezo mond e Kambr ar Gannaded. Amzer zo bet, ha netra ken, da zerra outo ar gael houarn.

Goude kreisteiz ne oe niver ebed mui d'an dispaherien¹. Êsaad a reent sevel bardellou; mez ar ward vunisipal o freuz kerkent. Mond a reent dre nerz e tiez an armure-rien, hag an armou a gavent a yee oll ganto. Pa gavent war o hent gwardou nasional, ha na vije ket kalz anezo, e lament o fuzuillou diganto. Hogen ne glaskent ket evid c'hoaz ober penn d'ar zoudarded; en eur dehel kuit e tao- lent hepken mein ganto. Ar zoudarded a oa souez o gwe- led. En em zerhel a rejont sioul ha diflach

¹ Goude kreisteiz ne oe niver ebed mui d'an dispaherien : red eo kompren : e oe eur bern dispaherien, kement ha ne heller ket ken konta anezo.

daoust d'ar vein ha d'ar hriadennou a laosked warno. Er hiz-se ne oe lazet den en deiz kenta, nag e-touez ar zoudarded, nag e-touez an dispaherien.

D'an 23 a viz c'hwevrer

D'an 23, mintin mad, ar ward vunisipal, ar zoudarded hag ar ward nasional en em gemeras euz a dachennou Pariz, hag euz al lehiou talvoudusa. An dispaherien, euz o zu, en em lakaas gwaz eged biskoaz da freuza ar paveou, ha da zevel bardellou e peb leh. Da zeg eur, tud armet ha skoachet a-dreñv eur vardell, a denn war ar ward vunisipal ; houmañ a respont, ha daou zen yaouank a gouez maro-mik. E meur a ru ema ar brezel ; kleved a reer tennou fuzuill, ha zoken tennou kanol. Hogen evel ma en em glev mad ar ward vunisipal, ar ward nasional hag ar zoudarded, an dispaherien ne dint netra evito. Ar ruiou, an tachennou en em skarz, ha dre ma tosta an noz, e kreder ema echu d'ar revolusion. Hogen da unneg eur diouz an noz, an traou a gemeras eun dro fall. Eur vandenn vad a zispaherien, eur banniel ruz en o fenn, a gerze war ar zoudarded a ree gward dirag ti ar ministr. Ar zoudarded a dennas, hag hanter-kant den a gouezas, lazet pe vleset. Ar bobl vunud a yeas e kounnar; embann a reas e peb leh penaoz ar ward vunisipal he-deus tennet war ar bobl heb lavared ger ! Kas a reer dre ruiou Pariz eur harr karget a gorgvou maro, evid isa ar bobl.

D'ar 24 a viz c'hwevrer

D'ar 24, mintin mad, an toksin a zon e pevar horn Pariz, hag ar ruiou a zo karget a dud kounnaret. Ar ward nasional a dro en tu gand ar bobl, ha diwar neuze eo gounezet d'ar revolusion. Ar zoudarded n'int ket evid tenna war dud onest ; ne reont mui nemed divenn o buhez, trist ha nehet, heb fiñva euz o fostou. Ar ward vunisipal hepken a ra penn d'ar bobl, med n'eo ket evid herzel euz a gemend-all... Pariz a zo d'ar bobl. Da eun eur hanter goude kreisteiz, palez ar roue a zo kemeret heb brezel ; urz a oe roet d'ar zoudarded da chom heb tenna, hag ar bobl a yeas tre, kros o fuzuillou en êr. Loeiz-Felep a dehas kuit dre ar jardinou, beteg an dachenn ma oe dibennet Loeiz XVI warni. Eur gariolennig a oa eno ouz e hortoz ; lammoud a reas e-barz, ar marh a ziblasas en daou-lamm, hag ar bobl, war a leverer, a daolas mein war e lerh. « Beaj vad dezañ ! emezo, evel-se en-deus greet d'e genderv ! » Pebez kentel !

E Kambr ar Gannaded e oa eun abadenn all. Loeiz-Felep, a-barz kuitaad e balez, en-devoa skrivet a-breskaer war eun tamm paper an dilez euz e gurunenn war benn e vab-bihan, ar Hont a Bariz. Kentiz ha ma oa digoret ar Gambr, an aotrou Dupin a lavaras : «Aotrounez, ar gêr a Bariz o veza en em zisklêriet evel m'he-deus, ar Roue en-deus greet dilez euz e gurunenn. E gurunenn hag e rouantelez en-deus roet d'e vab-bihan ar Hont a Bariz, dindan gward an Dukez a Orléans e vamm.» N'en-doa ket an Aotrou Dupin echuet mad e gomz, ma teuas e-barz ar Gambr eun Itron gwisket e kañv, ha daou grouadur dre an dorn ganti. An Dukez a Orléans e oa, hag he bugale. Eun niver braz a wardou nasional a zilammas e-barz ar Gambr war he lerh. Diêz e ve portrezi ar fiñv hag ar heflusk a zavas neuze e-barz ar Gambr. Ar prezidant a gemer ar gomz. « Evel ma hoh-eus e glevet gand an Aotrou Dupin, emezañ, ar Roue o veza greet dilez euz e gurunenn, ar Hont a Bariz amañ dirazoh...». « Nann ! nann ! eme an tu kleiz, n'eus netra hreet ; n'oh evid ober netra ; ar bobl a zo mestr, d'ar bobl eo da lavared peseurt gouarnamant a fell dezi.»

An Aotrou Lamartine a fell dezañ komz ; ne glever ket petra lavar. Eur hannad euz an tu kleiz, an aotrou Marie, a bign d'al letrin ; n'eo ket selaouet. An trouz hag ar zavar a ya bepred war gresk, ha kleved a reer en diavêz an tennou fuzuill hag an tennou kanol o kroza. Pa oa bihannaet an trouz, an Aotrou Marie a lavar : « Ar gêr a Bariz o veza er stad m'ema, n'eus ket a amzer da goll, red eo sevel diohtu eur ouarnamant gouest da ober eun dra bennag, eur ouarnamant hag a vezo selaouet gand tud Pariz. N'eo ket eur hrouadur gand e vamm da houarnerez a ranker bremañ da gaoud ; mez eun nebeud tud nerzuz a-benn da houarn, evid gortoz.»

-« Ya ! ya, eme ar bobl, eur houarnamant da hortoz ! »

An Aotrou Crémieux a lavar memez tra. Odilon-Barrot a gomz en tu gand ar Hont a Bariz. An Aotrou Genoud, beleg, a respont dezañ eo red goulenn ali ar vro. An Aotrou Larochejaquelin a gemer ar gomz da lavared ar memez tra. Mez d'an ampoent, eun engroez a wardou nasional hag a dud euz ar bobl a ziskarg e-barz ar zal, en eur grial : « Bevet ar frankiz ! Bevet Lamartine ! » Eur bern bannielou tri-kolor a verv e-barz ar Gambr. An Aotrou Ledru-Rollin a lamm d'al letrin : «En em ziskleria a ran, emezañ, en ano ar vro, 'eneb kement gouarnamant a oufe beza greet e-barz ar Gambr-mañ. Goulenn a ran a-raog peb tra mouez ar bobl.»

-«Ya! ya! mouez ar bobl, eme an oll. Bevet ar Republik !»

Ar prezidant a guita neuze e gador ; an Dukez a Orléans en em denn gand he bugale dre eun nor a-dreñv, hag an Aotrou Dupont-de-l'Eure a gemer plas ar prezidant. Eun den ha n'ema ket euz ar Gannaded a bign da vureo ar zekretourien, hag a ginnig d'ar bobl an dud-mañ evid kemer ar houarnamant.

Lamartine ? -Ya, eme ar bobl. Ledru-Rollin ? -ya ! Odilon-Barrot ? nann ! -Thiers ? -Nann ! nann ! -Dupont-de-l'Eure ? -Ya ! -Arago ? -Ya.

An anoiou all n'int ket klevet, gand ar freuz a zav e-barz ar Gambr. Kalz a lavar war eun dro : « D'an Ti-kêr ! d'an Ti-kêr da zavel ar ouarnamant evid gortoz. »

Eun den euz ar bobl a lavar diwar al letrin : « Respet d'an ilizou, ha d'an traou kaer a zo d'ar vro ! Respet da dra beb den ! »

An oll a respont en eur vouez : « Ya ! ya ! mad a livirit ! Bevet ar wir frankiz ! Bevet ar Republik ! »

Pobl ha kannaded mesk-e-mesk a guita neuze ar Gambr... Greet eo ar Revolution.

O weled eur revolution nevez c'hoarvezet en eun taol, o klevet krial a beb tu : « Bevet ar Republik ! », kalz a gristenien vad a gemeras aon evid o ilizou, evid o beleien hag evid ar houeñchou. Ar zoñj euz ar Revolution vraz a zeue e sperejou an oll, ha gand ar zoñj-se e teue leh da gaoud eun tammig prederi.

Or revolution, da vihanna e Pariz, a zo bet skwer an oll revolutionou. Pas eun iliz, pas eur gouent hag a ve bet touchet outo ; pas eur beleg, pas eul leanez hag a ve bet dismegañset.

Pa oe kemeret palez ar roue, anvet an Tuileries, ar bobl, gand an droug a oa enni, a vruzunas oll arrebeuri ar roue, ha pep tra e kambrou ar priñsez.

E Bro-Hall, a-drugarez Doue, ar bobl lezet ganti he-unan, a zo mad. Pa hoarvez dezi en em deurel d'an droug, mistrigou fall ha briz-doktored eo he atiz hag he zouell dre o gevier malisiuz. Hogen ar revolution o veza didarzet en eun taol, heb na oe den d'en em gemer anezi, ar renerien droug-se n'o-doa ket bet amzer d'en em gemer euz ar bobl, na d'he zouella. Setu perag eo bet ar bobl ken fur.

Setu amañ c'hoaz eur gentel gaer hag a ra enor d'ar bobl ; skrivet eo bet gand ar beleg e-unan ez eo c'hoarvezet an dro.

« Bet e oan, emezañ, e karter ar Vadalen oh ober dleadou va harg, hag e tistroen d'ar gêr. Ar brezel braz o

veza etre va zi hag al leh ma oan, e rankis klask an dro, hag ober c'hweh kwech mui a hent eged n'em-boa da ober. Tremen a ris heb lavared gaou, dreist ohpenn hanter-kant bardell. E beg ru ar repozouar, e tostais gand fiziañs ouz an dud a oa o tiwall ar vardell, hag e komzis outo. Unan anezo a respontas din : « N'ho-po ket aon, aotrou Person, ne hoarvezo droug ebed ganeoh en or hreiz-ni.» Neuze, en eur gas ahanon beteg ar vardell, e lavaras d'e gamaraded a-vouez uhel : « Enor d'ar relijion ! Respet d'ar veleien ! List ar sitoaiian mad-mañ da vond e-biou, ha divennit-eñ.» Dond a rejont d'am has beteg ar vardell all, o tiskouez kalz a zoujañs evidon, hag o lavared din komzou mad evid ober din kemer kalon. Ar vicherourien vad-se a astenne o daouarn din, a ginnige o breh din, en eur lavared : « Respet d'ar relijion ! List an den mad-mañ da dremen. »

Meur a wech e rankis chom krenn en va zao, ar ruiou o veza karget a dud. Neuze, va-unanig e-kreiz ar vicherourien nerzuz-se, o divreh en noaz ha sabrennou en o daouarn, e trugarekaen anezo evid ar stad a reent ahanon, hag evid an diwall mad a reent din. (An Aotrou Puguët, beleg).

A-drugarez Doue, muih a dud onest a zo c'hoaz e Bro-Frañs eged a dud fall. An eleksionou diweza o-deus diskouezet mad kement-se. An dud pinvidig, an dud a urz, o-deus bet e peb leh kalz mui a voueziou eged ar re a halver, e galleg, ar *Gomunisted*, daoust pegement a boan o-deus lakeet ar re-mañ war o horv ha war o spered evid kaoud an tu hounid. E soñj vad e oant koulskoude d'en em gavoud war benn ar vro, ha d'he gouarn diouh o doare. Meur a barrez e Breiz-Izel, gand aon na vije deuet ar veleien hag an noblañs da hounid, ha da zigas en-dro (na petra 'ta?) an *deog* hag ar *horveou*, o-deus kavet gwelloc'h rei mouez en tu gand ar gomunisted. Mad eo eta rei da anaoud d'ar parrezioù fur-ze peseurt tud a felle dezo rei deom da vistri.

Setu amañ war-lerh kenta kentel euz a gatekiz ar Gomunisted, skrivet hag embannet gand o doktored.

Katekiz ar Gomunisted

Goulenn: Hag-eñ zo Doue?

Respont : N'eus ket a zoue ; rag-se red eo kas kuit ar veleien, ha pila an ilizou.

G.: Hag-eñ en-deus an den eun ene?

R. : N'en-deus ket : pep tra war an douar a zo greet evid mad ar horv ; an den a hell laerez, laza, ober ar pezh a garo ; mar deo evid mad e gorv, n'eo ket divennet, ha zoken gourhemennet eo dezañ.

G. : Ha dleet eo kared hag enori e dad hag e vamm ?

R. : N'eo ket dleet ; ne vezo mui e-touez an dud na tad na mamm, na nez na kar ; ar gerent ne reont nemed laerez ha lakaad a-dammou karantez ar vugale ; ar gerentiez a zo penn-kaoz euz a gement droug a hoarvez dre ar bed.

G. : Ha mad eo ar briedelez ?

R. : Nann ; n'eus netra gwasoh evid ar briedelez : ar briedelez a zo eul lezenn fall a ra na hell ket an dud beva boutin ha beza eüruz. Hebdale, peb unan a hello kemer gwreg ha dilezel anezi, pa garo ; hag an oll gwragez a vezo d'an oll.

G. : Na madou an douar, nag an arhant, nag an traou all ?

R. : An oll draou a vezo boutin, evel ar gwragez. Pa varvo an tad, e vadou n'ez aint ket d'e vab ; peb den a gavo e lod euz park, pe euz arhant an hini maro.

E-giz-se e komz ar Gomunisted. Hervez o hentel gaer, n'eus na *droug* na *mad* e-barz ar bed ; hag arabad e ve lezenn ebed mui.

O va Doue, na ped tra lu a dremen dre spered an den paour, pa ne fell ket dezañ anzañ evid e grouer, nag heulia sklerijenn ho feiz !

Gwall zao miz Even

An dud a oa bet lakeet gand ar bobl a Bariz war benn ar ouarnamant nevez, d'ar 24 a viz C'hwevrer, o-devoe aon na vije ket digemeret mad ar Republik e-barz an departamañchou. Digeri a rejont eta e Pariz eur maread a diez-labour d'ar vicherourien, evid o haoud dindan o dorn, e kenkaz ma vije red ober brezel 'eneb tud Loeiz-Felep, pe 'eneb tud ar Vourboned. E berr-amzer en em gavas e Pariz ouhpenn daou-hant mil den, dindan an ano a vicherourien. Dond a reent euz a-bell hag euz a-dost, ha n'eo ket an dud onesta euz ar vro e oant ; konta a reer e oa en o zouez da nebeuta daouzeg mil den bet er galeou. Hanter-kant mil skoed bemdez a goustent d'ar vro, ha nebeud a labour a vije greet. An amzer da zond a lavaro peseurt skol a vije greet dezo.

Pa oe en em zastumet Kambr ar Gannaded, embannet ar Republik, ha lakaet eun tammig urz e aferiou ar vro, ar ouarnamant a glaske an tu d'en em zizober euz ar vicherourien dichañs-se, o veza n'he-doa mui ezomm ebed anezo. Ar re a garje distrei d'o departamañchou a

vije paeet ha dihaouet en o beaj ; ar baotred yaouank a vije enrollet en arme evel soudarded; ha labour a oa kavet evid eun niver braz a re all er-mêz euz a Bariz. Hogen ar vicherourien-ze o-devoa mistri all, Komunisted evid an darn-vrasa. Ar re-mañ a wele gand poan e kemere ar Republik eun dro re onest ha re zeread ; he diskar a oa red, ha sevel en he flas eur Republik all, gwir verh d'ar vamm-goz euz ar bloaz spontuz 1793. Kentel a oe roet d'ar vicherourien ; lavaret e oe dezo e oant ar re greñva, hag e vijent mistri e Pariz pa garjent. Ar vicherourien eta a revuz kuitaad Pariz ; ar bobl vunud, skoliet evelto, en em zav en tu ganto, ha d'an dri warn-ugent a viz Even, e teraou ar brezel e Pariz, gwaz eged biskoaz.

Ha c'hoant hoh-eus-hu da houzoud penaoz e vije - c'hwezet an tan e pennou an dud keiz-se ? Klevit : erruet int e niver a eiz mil den war dachenn ar Bastille ; eun den, Loeiz Pujol a reed anezañ, a bign en e zao war ar bez kaer a zo savet eno en enor da zispaherien ar Revolusion vraz.

-« Tennit ho tokou, emezañ d'ar bobl ».

-Hag an tokou d'an traoñ.

« Sitoaianed, emezañ, setu-c'hwi dirag bez merzerien genta ar wir frankiz ; war ho taoulin ! »

Hag an oll war o daoulin.

-« Ar verzerien, emezañ, a welom amañ o eskern gwenn, eveldoh, an dud-mañ o-deus greet eur revolusion gand o gwad ; mez beteg hirio, o gwad skuillet a zo bet didalvez. Eur revolusion a zo da ober a-nevez. Mignoned, emezañ neuze d'ar bobl, ar gaoz a zivennom eo ar gaoz a zivennas ho tadou. War o banniel e tougent skrivet : *Ar frankiz pe ar maro !* Ha ni ivez : *Ar frankiz pe ar maro !* »

Hag an oll da zevel ha da grial : « Bevet ar Republik ! Republik ar bobl vunud ! Bevet Pujol ! Bevet Barbès ! D'an traoñ ar ouarnamant ! D'an traoñ, Kambr ar gannaded ! »

Eur plah yaouank a zilamm euz a-greiz ar bobl da rei eur boked da Bujol ; hag ar boked a zo staget ouz troad eur banniel. An trouz a ehan en eun taol ; hag ar predig sioulañs-se a zo heñvel ouz an hini a vez etre daou darz kurun ; rag kentiz e savas ar griadenn spontuz-mañ : ar bardellou ! Ar bardellou ! hag ar bardellou a zav stank-hastank dre Bariz, war al lehiou merket hag ijinet pell a-raog.

Ar gwener 25 a viz Even

Ar bardellou a zave e peb leh didrouz ha war eun dro. An dud a oa oh o zevel a labour distrafuill ha war dao, evel pa vijent bet oh ober eul labour pemdezieg. Hag ar pezh a zo souezusoh c'hoaz, pennou ar ouarnamant o leze

da ober. War-dro kreisteiz hepken e oe klevet an taboulinou o hervel ar ward nasional, hag ar bobl a doulle an taboulinou dre m'o havent. Tregont gward nasional a ya dre ar ru gand pevar dabouliner evid o diwall. Gweled a reont eur vardell ; sin a reont d'an dud a zo warni na dennjent ket ; hag i o-unan a dosta, o armou war vreh, evid diskouez ne felle ket dezo tenna kennebeud. Hogen, pa oent arru peuz-dost, ar vardell a gemer tan, eun diskarg fuzuillou a reer warnezo, ha deg den a gouez war ar ru, beuzet en o gwad.

Pa oa digouezet sikour, ar ward nasional a gerz adarre war ar vardell ; erru int beteg enni, emaint o vond d'he skeulia ha d'he hemer. En eun taol, an doriou hag ar prenestou a zigor a beb tu, hag a skop ar maro warno. An tiez a oa karget a zispaherien armet beteg an dent. Ar ward nasional a rank dond war he hiz. An dispaherien a lamm diwar ar vardell, en eur grial : « A-raog ! gounezet eo deom ! » D'an ampoent e klever eun daboulin ; ar jeneral Lamoricière, eur Breton kaloneg, eo, gand e zoudarded. Tostaad a ra e-unan ouz an dispaherien, da ésaad komz outo. Tennou fuzuill a gaser dezañ evid respont. An tan a zigor neuze a bep tu. An hini a hourhemenn war ar vardell, eur banniel en e zorn, a gouez d'an douar, hag e vanniel gantañ. Eur vaouez yaouank a zav ar banniel hag a gemer e blas. Ar zoudarded a gri dezi en em denna kuit. Hi a ra goap anezo, hag a hej he banniel da gentraoui he zud. Tud ar vardell a denn ; ar zoudarded a respont, hag ar vaouez a ruill d'an douar maro-mik. Eur wreg yaouank all a gemer he leh ; sevel a ra ar banniel, ha kas a ra d'ar zoudarded taoliou mein ha komzou faeüz. Eun diskarg tennou a reont, hag ar vaouez kêz a gouez e-kichenn he hamaradez. An tennou a ehan war ar vardell. War urz ar jeneral, ar zoudarded a ya war-raog, ha teir bardell a zo kemeret taol-war-daol.

Eno e c'hoarvezas eun dra gaer meurbed hag a zellez beza skrivet. An Aotrou Clerc, gward nasional en deirved lejion, a vrezeleka gand e vab en e gichenn. E vab a gouez, tizet gand eur bolod. An aotrou Clerc her hemer en e zivreh evid e gas kuit. Eur bolod all a sko an den yaouank hag hel laz mik etre divreh e dad. An aotrou Clerc a ro e gorr d'ar re a zouge ar horvou maro, en eur lavared dezo peleh e oa e di. -« Mez c'hwi, eme an dud-se dezañ, da beleh ez it-hu ? » -« Da glask e vreur », eme an aotrou Clerc.

Erruet en e di, e kav e vab yaouanka.

-« Da vreur a zo lazet, emezañ d'ar paotr, dal ! Kemer e fuzuill, ha deus d'e veñji ».

Hag e tistroont o-daou da vrezekaad e penn ar ward nasional.

E-barz ar harter-ze, ar brezel a ehan ; an dispaherien a zo trehet. Ar ward nasional a zo trist ha teñval dre 'n abeg d'ar hollou he-deus greet ; hogen n'eo ket digalonekaet. Ar jeneral Lamoricière a lavar a vouez uhel : « N'eo ket eun êsa on-eus da ober, paotred, hogen eur brezel euz ar re skrijusa. An dispaherien a zo daou-ugent mil anezo. Kenteliet int a-bell 'zo war ar pezh o-deus da ober ; bleniet int gand mistri gouizieg ha gand jeneraled kaloneg ; ha war e-leiz euz o bannielou e welit skrivet : *Mar gounezom, preizerez !... Mar kollom, tangwall !* »

Kelou kañvuz a zigouezas a beb tu. Meur a gabiten, meur a zen enoruz, a zo lazet pe houliet. Ar hanol a groz war-zu Iliz-Veur an Itron Varia. Ar jeneral Bedeau, hag eñ Breton evel Lamoricière, a zo o vombardi eur vardell spontuz na heller tostaad outi nemed a-dennou kanol. Ar vardell a zo kemeret; mez tri-ugent den euz he soudarded a chom war ar ru, hag eñ e-unan a zo tizet en e vorzed. C'hoant en-deus evel atao da chom war benn e rejimant, mez heb dale e rank kuitaad, na hell mui.

An aotrou Biccio, unan euz ar Gannaded, a bak eur bolod e-kreiz e galon, eur burzud eo n'eo ket maro. Clément-Thomas, kabiten braz ar ward nasional, Ernest Saint-George, mab an aotrou Saint-George, euz a Vreiz-Izel, hag eur maread a dud enoruz, a glever a zo gouliet. Da eiz eur eo ehanet an tennou. An dispaherien o-deus kollet e peb karter o bardellou kenta ; mez ar re greñva, ar re dalvoudeka, an drederenn euz a Bariz koulz lavared, a zo c'hoaz en o galloud. Mil den a gonter a zo bet lazet pe houliet en dervez kenta-ze.

Ar zadorn 24 a viz Even

Da eun eur diouh ar mintin, e krozas a-nevez an tennou fuzuill. Kambr ar Gannaded, a oa chomet e-pad an noz e dalh, a embannas : « Ar Republik a gemer evid he bugale, intañvezed ha bugale an dud vad maro er brezel an dri warn-ugent a viz even ; ha paotred hag intañvezed ar re a hellfe mervel c'hoaz o tivenn an urz-vad, ar wir frankiz, ha gouarnamant ar Republik. »

Dre ma teu an deiz, e kresk e peb leh an tennou; hag ar Gambr a embann kement-mañ : « Pariz a zo lakeet dindan lezennou ar brezel ; oll halloud a zo roet d'ar jeneral Cavaignac.»

Da nav eur, ar jeneral Cavaignac a ro urz da ehan ar brezel ; diou eur a roer d'an dispaherien da ober o zoñj.

An dispaherien ne fell ket dezo kleved komz a beoh. Kredi a reont he-deus ar ouarnamant aon razo, hag e teuont herrusoh eged biskoaz. Da ziv eur e kemeront dre nerz an Dachenn Roueel. Tri-hant soudard, gronnet eno gand pemzeg mil den, a zo greet prizonerien. An dispaherien a vrezeleka eno gand kemend a daerijenn ma teu ar jeneral Duvivier da gaoud aon. Goulenn a ra sikour, hag eur poulzadig goude eo gwall houliet. Er harter-ze hepken e hounezas an dispaherien e-pad eur poulzadig amzer, el lehiou all ne oant ket evid herzel ouz ar ward nasional hag ouz ar zoudarded. Mond a reent war o hiz, mez nebeud a-walh ; ha kalz muioh a dud a lazent eged na gollent o-unan. Peb dor, pep ti en-dro d'ar bardellou a oa kreñvou brezel a ranke ar zoudarded da gemer dre nerz. Ha pa vijent eet e-barz eun ti a-dreuz d'an tennou, an dispaherien en em denne kuit dre zoriou a-dreñv greet ganto a-ratoz evid se.

An dispaherien a ziskouezas kalz a grizderi e-keñver ar re ne oant ket en tu ganto. Laza 'reent heb truez ebed neb a goueze etre o daouarn. Hag ar merhed o-unan a oa krisoh eged ar vrezelourien. Kavet ez eus bet soudarded ha tud yaouank euz ar ward skañv o-devoa trohet dezo o gouzoug, o daouarn hag o zreid. A-wechou e reent van da zigemeroud en o ziez ar re bistiget evid o farea, hag e lazent anezo dre dreitourez. Koulskoude e-touez an dud keiz-se diboellet, e oa eun den bennag truezuz, evel e leh all. Eur wech edod o vond da fuzuilla eun nebeud soudarded greet prizonerien ; hag eun den en-devoa c'hoant d'o zavetei a lavaras : « Mad eo, a-dra zur, tenna warnezo, mez perag toulla o dillad nevez ? O diwiskom da genta.»

Ar jeneral Damesme a gasas ar habiten Laverdeau da spia tro-war-dro eur vardell. Paket eo ar habiten gand an dispaherien, ha gourdrouz a reont e fuzuilla ma ne gar ket brezelekaad en tu ganto. « Va buhez, emezañ, a zo etre ho taouarn, grit a gerot ahanon, hogen birviken ne gerzin eneb va jeneral, nag eneb va bro.» Ar fuzuillou a ziskenn warnezañ. Neuze eur zoudard koz en em laka etre ar fuzuillou hag eñ, hag a lavar groñs ne lezje biken laza dirag e zaoulagad eur brezeler dizarmet. Ohpenn a eure. Mond a reas hemañ da gas ar habiten Laverdeau beteg ar jeneral Damesme; hag evel ma klaske an ofisourien e zerhel ganto, evid e haredoni, eñ a respontas dezo : « Grit ho labour, me a zistro d'am hini.» Hag e teuas en-dro da gavoud e gamaraded. Deg munutenn goude, ar jeneral Damesme en-devoa e vorzed torret gand eur bolod.

Ar jeneral Brea en-devoa kemeret leh ar jeneral Damesme. Goude beza kaset an dispaherien war o hiz eur

pennad mad, eh erruas gand eur vardell. Goulenn a reas komz ouz ar re a oa warni. War o asant e lamm en tu all d'ar vardell gand an Aotrou Magin, e eil a-gamp, hag eun ofisour all. A-veh emaint e-touez an dispaherien, ma kroger enno, ma o foulzer en eun ti ; hag eno int lazet, begou ar fuzuillou war o halon. An ofisour, dre vurzud, en em guzas dindan eur hoz gwele-kamp, hag en em zaveteas. Euz ar guziadell-ze eo e welas fuzuilla ar jeneral hag e eil a-gamp.

Daoust d'o hounnar ha d'o herrder, an dispaherien a rank plega hirio evel deh. O bardellou a freuzer a-dennou kanol, o has a reer war o hiz a di da di, a ru da ru, beteg an tri harter o-deus greet o hreñvou-brezel enno. An tri harter-ze a zo : Park Saint Lazare, fabourz Saint-Marceau, ha fabourz Saint-Antoine. Disklêria a reont e raint o bez euz ar harteriou-ze kentoh eged en em renta. «Mar dom trehet, emezo, ne gavfot war ol lerh nemed eskern ha tiez luduet.»

Tostaad a ra an noz. Pariz ne deo bet biskoaz ken teñval na ker spontuz. An doriou, ar prenestou a zo serret ; an toksin a zon kañvuz e pep parrez ; an tennou kanol, an tennou fuzuill a groz e peb tu ; an heol a guz evel en eur poull gwad.

Ar zul 25 a viz Even

An dud a vrezel a zo bet souezet o weled an dispign foran a ree an dispaherien euz o zennou fuzuill ; mall a oa gouzoud a beleh e teue dezo kemend a boultr hag a volodou. Teurel a reer evez d'ar zul vintin war gement-se, hag e paker meur a zen ha meur a vaouez dreist-oll, a gase munisionou d'ar vrezelerien, pep hini en e hiz. Marhadourezed lêz a oe paket, o boestou houarn-gwenn leun a boultr; eur banne lêz hepken a vije e beg ar boestou. Pevar den a ree van da zougen war eur hravaz eun den goullet ; ha pa oe dizoloet ar hlañvour, e oe kavet eur holhed karget a gartouchennou.

Pep tra a lavar e vezo tomm an devez. Gwardou nasional a zigouez e Pariz euz ar hêriou tro-war-dro, muioh a ganoliou a ruill dre ar ruiou. Da nav eur ema ar brezel en e dan evel en deveziou all. An dispaherien o-deus greet euz a ziou pe deir iliz evel kreñvou-brezel. Ne leverer ket evelkent o-defe greet dismegañs ebed d'an traou sakr. An tiez brasa o-deveus ivez kemeret ha kreñveet er memez tra. An tennou kanol a zivarh doriou eur zanaill vraz karget a vrezelerien, hag ar jeneral Lamoricière a zaill enni ar henta etre an oll, evel en eur

hreizh-brezel kemeret dre nerz. Ar vicher-ze en-doa desket e Koñstantina, ha ne fell ket dezañ he ankounac'haad.

Hogen e ru Saint-Antoine eo ema ar brezel braz. Eur vardell pe ziou a zo kemeret, mez kalz a dud a goller. Eun ofisour a zeu da glask sikour da Gambr ar Gannaded ; hag ar jeneral Négrier a ya gantañ, gand daou vagad dragoned, soudarded all ha gwardou nasional. Netra ne harz outañ. Ar bardellou a zo freuzet; an tiez roget gand an tennou kanol a hourdrouz koueza, hag an dispaherien a zo enno a rank difourka er-mêz, pe beza flastret dindanno. Erruoud a ra en doare-ze dirag bardell vraz fabourz Saint-Antoine. Ar hanoliou a zo e-pad ar mintin o tenna war ar vardell-ze heb galloud he boulha. Ar jeneral a êsa komz ouz an dud a oa warni ; tostaad a ra outo an aotrou Carbonnel hag eñ a lavar eur gomz bennag ; mez kentiz eun diskarg fuzuillou, deuet euz an tiez a-uz dezañ, hen diskar war ar ru. Astenn a ra e zorn d'an Aotrou Carbonnel, gouliet e-unan, en eur lavared dezañ : « Gweled a rit, ha lavared a reot d'ar vro e varvan eviti, Gall, hag e gwir zoudard. »

Maro ar jeneral Négrier a ro kalon d'an dispaherien ; mez e zoudarded a zo eet e kounnar, trei a reont ar hanoliou war an ti eo deuet dioutañ an tennou, hag an tikêz a gouez en e boull. D'ar mare-ze ar jeneral Lamoricière a errue beteg fabourz an Temple, dalhet c'hoaz gand an dispaherien. Krial a ra dezo en em rei. Eun den a zeu euz o ferz da gomz outañ. Marhad ar jeneral ne blij ket d'ar micherour. «Mad, mad, eme hemañ, beza on-eus c'hoaz poultr ha bili-plom evid tri devez. » Hag e tistro da gavoud e re, heb beza zoken tennet e dok d'ar jeneral.

Maro an Aotrou Arheskob

Abaoe ma oa deraouet ar brezel, Arheskob Pariz n'en-doa ket ehanet da bedi Doue evid e zeñved ker, ha da houlenn ma plijfe gantañ digas fin da eun emgann ker glaharuz. D'ar zul vintin, goude beza lavaret an overenn zantel evid ar gêr a Bariz, e lakaas en e spered mond e-unan da gavoud ar bobl-se faziet, evid he fedi da guitaad heh armou. Hogen ne helle ket ober eun dra evel-se heb goulenn ali digand ar jeneral Cavaignac, ha kaoud e aotreadur. Mond a reas eta da gavoud ar jeneral gand daou euz e vikeled vraz. Ar bobl, o weled an eskob mad war ruiou Pariz, a ouie ervad ar pezh a oa en e galon : «Mond a ra, emezo, d'en em deurel etre ar vrezelidi, evid miroud na dennint mui pelloh an eil war egile. » E peb leh

e oe digemeret gand an doujañs hag ar garantez ar vrasa. Ar mammou kristen a gave neuze hardisted a-walh evid dond er-mêz euz o ziez d'en em deurel war o daoulin dirag o Eskob gand o bugale, evid kaoud e vennoz.

Hebdale, an Arheskob a gerz etrezeg fabourz Saint-Antoine, el leh m'edo ar brezel en e dan braz. Oh e weled o vond e-biou, pep hini a lavare en e galon : « Êl ar peoh a zo diskennet en on touez ; Doue ra vennigo ar pez ez a da ober ! » Ar baotred a denne o zokou hag a blege o fennou da zigemeroud e vennoz. Ar gwrazez hag ar vugale a goueze d'an daoulin. Ar zoudarded hag an ofisourien a zouge an armou dezañ, hag aliez e oe klevet ar griadenn-mañ : « Bevet ar Relijion ! Bevet an Arheskob ! » Paotred yaouank ar ward skañv, o tistrei diouz an emgann, dupod gand ar poultr, a zirede d'e gavoud, a groge en e zaouarn, en eur lavared dezañ : « Aotrou Arheskob, c'hwi hoh-eus kouzoumenet ahanom, bennigit c'hoaz or fuzuillou, ha netra ne vezo treh deom. » Gwrazez e-leiz, gand eur galon vad ha didroidell, a roe dezañ lien ha chalpiz, oh e bedi d'o has d'an dud gouliet, pazeogwir ez ee en o zouez. « A-dra-zur, emezañ dezo, gweled a rin on tud gouliet en eur dremen, hogen mall eo ganen arruoud er bardellou, evid êsaad mouga ar brezel, ha miroud ne vezo greet gouliou nevez. »

Dre ma tostae ouz al leh emedo an emgann braz, an ofisourien, an daelou en o daoulagad, a lavare dezañ : « Diwallit, Aotrou Arheskob, na dit ket pelloh, ne viot ket selaouet, lazet e viot. » Hag e tanevellent dezañ maro ar jeneral Négrier, hini ar jeneral Bréa, ha maroioù tud all o-devoa klasket komz ouz an dispaherien. Mez an Arheskob a responte dezo, gand eun êr a beoh hag a vadelez : « Kredi a ran ne dennint ket warnon. Keit ha ma em-bezo eul lommig esperañs da helloud mired na redo ar gwad, e fell din mond d'o havoud. Goude oll, va buhez-me a zo nebeud a dra ; ar pastor mad a ro e vuhez evid e zeñved. »

Mond a ree bepred gand e hent. En eur dremen ez ee e-barz an tiez a oa dastumet tud gouliet enno. Eur gomzig vad ha santel a lavare da bep hini klañv, hag absolvi a ree ar re dare da vervel.

A-hed eun tenn fuzuill diouh ar vardell vraz e chomas en e zao. Diskouez a reas d'an ofisour a oa eno asant hag aotreadur ar jeneral Cavaignac, hag e bedi a reas en ano Doue da ehana an tennou kanol hag an tennou fuzuill. « Mond a rin va-unan, emezañ, gand va beleien, da gavoud an dud kêz-se touellet ; kredi a ran eh anavezint va zoutanenn violed hag ar groaz a zougan war va halon. » Goulenn an Arheskob a oa evel eun urz dirag an ofisour mad-se. An tan a ehanas euz a du ar zoudarded,

ha kentiz ivez eus a gostez ar vardell. An dispaherien en em ziskouezas war lein o bardell ; douetañs o-devoa e tremene eun dra gaer bennag war al leh. Pa weljont euz a-bell an Arheskob, kalz anezo a droas troad o fuzuillou en êr.

Kalz a wardou nasional o-devoa pedet an Arheskob d'o lezel da vond d'e heul, evid e zivenn mar bije ezomm, pe mervel gantañ. An Arheskob n'o lezas ket da zond. Eur micherour hepken, den mad ha kaloneg, a lezas da vond en e raog, hag en e zorn eur brank palmez glaz, evid arouezi ar peoh a felle dezañ da gaoud. Hogen meur a zoudard ha meur a ward nasional a yeas war e lerh, petra bennag ma en-devoa divennet outo. Heb dale eo digouezet e-harz ar vardell hag e-touez an dispaherien, a ziskennas war an dachenn d'e zigemeroud ha d'e zelaou. Meur a zoudard ha meur a ward nasional en em vesk e-touez an dispaherien gand mall d'o briata ha da ober ar peoh. Mez siwaz ! en eun taol e savas trouz ha tabut etre eur re bennag anezo ; eun tenn a zo laosket dre zarvoud pe dre zroug, hag ar griadenn-mañ a zav : « D'an armou ! d'or bardellou ! gwerzet om ! » Ha setu adarre an tennou a bep tu, gwaz eged biskoaz.

« Koustet pe gousto, eme an Arheskob, komz a rankan ouz ar bobl-mañ faziet.» Hag e lammas en eun ti, ha dre eun nor all e tigouezas en tu all d'ar vardell, e-kreiz an dispaherien. Êsaad a ra, ha dre zin ha dre gomz, herzel ha peoc'haad ar bobl tud-se kounnaret, ha dond a ree a-benn d'hen ober, rag diredeg a reent oll en-dro dezañ d'e zelaou, ha d'en em estlammi war e hardisegez ha war ar garantez vraz-se a ziskoueze en o heñver. En eun taol e kas e zorn d'e gostez : « Tizet on, va mignon, » emezañ d'an hini a zouge ar brank palmez. Hag en eur lavared se, e kouezas d'an douar. An dispaherien en em zastum endro dezañ ; hen digemer a reont en o divreh, hag hen dougen a reont dre heñchou distro da di person Saint-Antoine. An dud-se, nehet ha digonfortet oll gand eur mestaol ken dizeur, a ziskoueze e peb feson o doujañs hag o harantez evid o Eskob.

-« Pebez gwalleur, emezo, gouliet eo !... or pastor ker, on tad karantezuz, deuet evid or zavetei !»

E vevel mad, deuet d'e heul heb gouzoud dezañ, a oa ivez pistiget ; hogen ne oa ket ker gwaz hag an Arheskob.

An tenn a dlee beza deuet euz a eur prenest ; rag ar bolod a dizas an arheskob, eun draig uhelloh eged e gazell zehou, hag a yee war ziskenn tre beteg ar vorzed kleiz. Ar bolod ne oa ket moulet ker kaer ha ma'z eo re ar zoudarded. Kredi a heller eta, siwaz, eo bet lazet an Arheskob a-ratoz-beo gand eun den milliget bennag.

Ar Pastor mad en-doa roet e vuhez evid e zeñved, hag e zakrifis a oa bet kavet mad gand Doue ; rag eun eurvez goude ma oe skoet, eh ehanas an tennou, hag ar brezel koulz lavared.